

DAOU DEN YAOUANC.

En Naonet, ha separ a c'hilac'har en Ker Lavalette.

Var un tou nevez,

BRETONET a vas Vreiz-Izel, grit du arret d'am c'blevet,
Ma teclarin dec'h eur guentel so en ho mesq' composet
Eus a gomzou eur fumelen ha va re da c'nebi,
Comparachabl eus eur flouren a zo anvet romani.

En eur vaper e voyagi, me am boa bi rancontr
Ha dre v'ri e galantiri e oan anter soupenet,
E velet eur music flamanq' a ziral a zono,
Hac ar verdally yaouanc' var bond al lest a zance.

Dre ar stoni vad a exile ab appel e c'heulennis
Pe seurt alliang a c'heuille ha petra e beneñs,
Ha ma oa prest din respontet : eur vates a gonfiang,
Er vro-ze neve arriet evit servich an noblañs.

Dre ho demarch en polites, gand un douger qer charmant,
Da sulva ho c'hompanignes em boa eun desir ardent :
Mes va dapeign en comparis d'e guenet pa gomprenen,
Nemet eur s'quet a yonannquis ne oa quen en e c'hichen.

E qer an Naonet e gouelis goude-ze e sortial,
Pa oa finisset an oflic, eus an ilis cathedra :
Va dorn er p'inciu a laqis, da guemer dour benniguet,
Hac ebete e avancis, ma devoa ma saludor.

En gallec, neuse gant doujañs, def men a lavaras :
C'hui rapport dre humiliang e verc'h traou breis yzelas ;
Car reglennou ar fierte so er vro man conduit,
Mes reglen an humilite a so nebeut implijet.

Ma respont, ep distref en dro, brillant, douc ha quer tener :
Ya, me sorti eus va bro, divar rout ker Landreguer,
Hac ar pez am laqua jenet e ma meus ampechamant
Er principou a so fixet dre ar vro man da barliant.

Em brezonec neuse souden et teulis da anonci,
Me reqet dre antretien, plac'h yaouanc, o condui :
Ma sorti a rout Landreguer merq o teneredigues,
Me a zorti a rout Finister, a draesyeñ qer Montroules.

Den yaouanc, emei, certain, en desir ho fantaai,
Heulomp reuq an estranjourien gant furnes ha modesti,
Ma c'halla en eur gomzout en zombrach hor c'gomzou,
A chasseal an angoni a ra va jomanchou.

Fumelen, me to ep cessi evel hirvoud eur sermon,
Daelou va speret et voe'le'bi plaç ar gousolation ;
Mes nebeut e vin consolet, car dont a ran da gredi
C'hui vo bourreo d'am joausdet, goude va accompagni,

Den yaouanc, va exempl vigner mar be ferm ho santimant,
A vo eur breuven a sclerder eus hon amitie fervant
Da bini e vezin fidel bete an de eus va fin,
Ha ma renqan en dilezel, e vo poesant va chagrin.

Neuse da assina un de eus on amzer da zonet,
Ma refomp dre sincerite merq un union barfet,
Demp da choas ar guir garante en jardin ar fleurdilis,
Evit gouvern on amitie ar rest eus hor yaouannquis.

Ya, emei, er garcen eus ar fleurdilis caera
Demp da choas peba a gurunen, a vesq ar re brillanta,
Pere a blassimp en armel a drezor ar yaouannquis,
Ha dre on union fidel, ni ho dougo d'an ilis.

Dre v'ri ar signal a squeudid e mellezour ar furnes
Hac an deign a anonci, m'ar be solid, ma mestres,
Goude an deves assinet, a dra' facil e erlan
Ne separo mui hor speret, hed hon deyou er bed-man.

Hac eneal, va servijer, regien hor promesseou,
Mar bec'h evelon e fermet, ne deo qet a arretou,
Mes grad intancion erfad, en de-se a b'eparet ;
Ne verc'h un c'nebi ingrât dar merqou a brometet.

Salocroas gant va bolante ! Mes finissomp da barliant,
Hac arretomp var qement-ze, car fin an de a gommantid.
Adieu a lavaran eta, en esper d'en em velet
An de-se e c'haparissa er plaç hon eus assinet.

Mes de an assassinacion, ar goas a oa bet manqet
Hac ar plac'h a impinion neuse arria doctet,
Dre ma crede facilamant e oa dai godisser
Car fragilon e sautimant e deoa contet re scler.

Un de goude, var ho daoulin e oaint en em remerqet
E conent Santes Catherin, dirag auter an Drindet,
E lec'h mo deoa soutenot or bounera tomderen,
Incomoreñabl da bep speret a dud ar bed da gompren.

An den yaouanc, pa remerqas victim e zociete,
Var e vemoar et tisqennas flamineñ an amitie ;

Mes ebete en em arret a c'goude ar gousolacion,
En Naonet e c'c'hoar assinañ eus an assassinacion.

Mes ebete en em avanç e oa ginet en gurion ;
Men a deuyo da repariu va oll faulou passeet.

Ar c'harunennou fleurdilis, emei, ma servijer,
Eus a armel hor yonannquis a zo collet or sclerder ;
Mes mar cavit ar sclerder-ze en deoa d'o assambli,
Nin o fleurisso a neve ha doubla o yeoni.

Hor c'harunennou, va mestres, ne allan qet da gavet,
Car ne varehem qet assambles er poent ma oaint dianquet,
Ha mar bec'h din godisseres, me vo hirvoudus rentet ;
Chui e oa o gouverneres ha dec'h e oaint adresset.

Dec'h diveza, va zervijer, e oa bed din lavaret
Evit passeal an amzer e tout d'am d'ampremet :
Dre ze, pa e d'am bolante heul urzou ar virione,
Ne avançit mui va bete, evit heul faus amitie.

Va mestres, james ne gredit e ve en guirion pisset
An dragidien ipocrit a goms an teod nulliguet ;
Mes heuilomp ar bromesseou a gondemp qen leal,
Ha lezit oll droug oberou ar goel deodou infernal.

Retardit o steudi monden, ma sclerien va speret,
Car e lec'h ma coe ar veen e ve ive divranqet,
Ha gant un aeb a draizon c'hui deu da zisgricenti
Ar bod ros a opinion pini oa eus hon henebi.

Mari-François, a dra onirion, ha c'hui a alfe credi
E teufem da c'heuil traizon a bemp leo d'ho frecanti *
Reqeti ran punition a beurs Doue, gant justic,
Ma condufen un urs poeltron euel or gouir yaouannquis.

Ya, den yaouanc, eb difer, red e vije'ch eur poeltron :
Heul a rec'h poent eur godisser, de hon assinacion,
Car ma vije bet fermamant ho prepojou angajet,
James ide ho santimant c'hui n'ho pije trahisset.

Gant eun nom bras a dourmanchou en hon assinacion,
Ma ne barissen a gomzou e parissen a galon,
Eur precursor, c'hui al credi, so c'az evel eun treujou,
Pini, qement a ya en ty e man indan ho boutou.

Ya, eus ar brecurseter e ser dor al liberte :
Credi a ran ar barfetel a avançit va bete ;
Dre ze eta renouvelomb on reglennou commancet,
Ha goude e c'hanavefomp hac int a vo faus verqet.

Mar deomp da renouveli or joausdet a neve
Antreid en eur ofrebiri, da c'hoas merq on amitie,
Pini, mar bec'h cri a gari d'ho traissa dre gomzou,
Eus o torn men a receo da bognardi va joayou.

Mar recevit da respondanç eus vest en olfant guen
A douguenni va alliang composet en aour melen,
Merq hon amitie mea choaso gant eun nombr bras eus a joa,
Hac a zoufre quen ar maro evit dont d'en traissa.

An daou den yaouanc-man a gred, dre eur sort sincerite,
E anfermet, assur, er bed, ar rancontr eus o ide ;
Mes be o deus da souteni pouer an teir flouren mechant
Pere a so anvet sourci, ha melleoni, ha tourmant.

Va mestres, din zo smaret eur bec'h poumner ha forbañ,
Ar murmur e ma partifet vit ar guer a Orlean,
Penos resista d'an anquen, en de-se a angoni,
E tont da freza ar chaden a zo eus hor c'hondui.

Allas ! emei, va c'hras mechant e deus bepret va c'heuillet
Bremen, pa oan jooussamant q'ent eus va bro ecartet,
Goled e teufe e rigueur d'am plassi en eur feson,
Ha da ma plonji er malheur bete griou va c'halon.

Salut ha c'hilac'har, va mestres, en porchet Sant-Semilien ;
Ari an urz hac ar finves pini a rai va troublen ;
Car ne vo qet cos on doare c'hui vo chanchet ho comzou,
Hac o po collet an alc'hoec e drezor hor memoariou.

Salocroas ne golin bigen merq hon amitie dener,
Avançomp bete ar blienen ma passeomp hon amzer
Da arouzi gant hon daelou ar boqeden fleur bian
Eus a jardin o prepojou, en amban Kerzerlan.

Er plaç-man eta, va mestres, finissomp hon oll gomzou,
Car ne varehomp mui assambles ed ar rest on devezou !
Dre ze qiniadomp a galon, ya, evit birvijer,
Adieu er b'edication dirac ar mestr souveren.

Va servijer, qen discleria ha donet da gontempli
Litanion Santes Anna ha re ar Vere'les Vari.
Adieu a galon anteret qen a vo apparissa
Da c'hortos ma vezimp barnet en izelen Jospha.

* Goude ar c'hoar assinañ eus an assassinacion,
Eus Naonet e c'c'hoar assinañ eus an assassinacion.

Neuse, er mes int sortfet a jardn o amitie,
Ebars er guer a Lavalette, var bord ar c'hanal neve :
Ene e cessi ar c'hiniat hoc en fern antretien,
An daelou eus o daoulagad a boulaide en ho c'hichen.

Va mestres, breman men droyo, ya, vel un den mantret,
Eh arbi bete va bro, da obtent joandset ;
Prosternet a rin en Montroulez, gant eur merp a vodesal,
Dirag retablen ar Yerc'hes, eb his Sant-Malant.

Hac en leal, va serviger, er memes intancion,
E caren e ve amzer ma ven arl en c'hanton.
Pa avanci c'hoaz, gand adres, va mouses a humilite,
Dirag mach Santes-Agnes, an iliz Berleonec.

Tud yaouane, ne assambit get gen ferm ha nin ho chaden ;
Eur guir amitie separat a eo mortel da zouten :
Gar evit ne ve get serfet var ar busaeh, dre gonzoz,
Ar galon a ve glae haret ha heuet en daolon.

Ar Zou-man, en guirione, franeq a vev un de ropiet
Gant un amenezur yaouane, ebars en ger a Naonet ;
Anvet e Olive Mencer, dre serfiter en peh sin,
Hac ar plach yaouane a anvet *Muri Fernqueas Volastix*.

An daou den yaouane-mad, a oessol ar c'hun a lousho c'hoizoz,
A esper e hoas, en eur respont, a speret dre hiron,
Ha ma na ellont assambit var ar bod-man ho boue,
O deus soueh d'en em saludi en goar an c'erite. AMEN.

PEDEN AR MOUSIK BIAN D'AR WERC'HEZ.

War don : *Potred Ploulliau. Kan 75.*

Ma mammik gez ha ma ferson :
A lavare d'in bemde!
Ho pidi a greiz ma c'halon
Ha da noz a da veure.
Ma chelaouet Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann,
Eur zellik hep ken, ia! eur zell
War ar paour mousik bian!

An evnedigou pa greskont
A ia er mez euz ho nez :
Da gentan gand aon e nijont ;
Ho mamm zo war ho evez.
Pell man ma mamm, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann :
Eur zellik hep ken, ia! eur zell
War ar paour mousik bian!

Pa m'euz bet laret kenavo
D'am mamm gez war he gwele :
Pegoulz, em-hei, evi distro!
Ha ma mamm haour a wele.
Dioec'het-hi, Gwerc'hez santel,
He foan eo ma foan vrassan :
Eur zellik hep ken, ia! eur zell
War vamm ar mousik bian!

Ma c'hoarik vad, ma c'hoar Anna
A iel d'an iliz bemde
D'ho pidi c'hoaz, itron Varia,
Vit ma zad, vidon ive,
Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel,
Eun ine diouz ar gwellan :
Eur zellik hep ken, ia! eur zell
War c'hoar ar mousik bian!

Pa iemp da laret hon peden
Hon daouigou d'ho chapel
Ma c'hoar lare : « Sell eun dolen
« War-n-hi ar Werc'hez santel
« Hag a c'hoarz ouzimp gant true!
(A oamp eun oad teneran.)
« Ma sellet ha ma breur ive
« Ar paour kez mousik bian! »

Enn ho tolen, o Gwerc'hez kaer,
E weler ho mab Jezuz
War ho tivrec'h, bugel dister,
Ken mad, ken karantezuz.
Ho mab dinac'h netra ne hall,
D'ac'h, mamm ar c'halloudekan,
Gallout a c'hellet ta diwall
Ar c'hez paour mousik bian!

Ma mamm a lare d'in liez
Eo mestr a bep tra Doue ;
Mes Jezuz zo Mab ar Gwerc'hez,
Petra n'hell mamm eur Roue ?
Ma diwallet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann ;
Eur zellik ep ken, ia! eur zell
War ar paour mousik bian!

CANAOUEN NEVE

Gret en honor da beder dimezelle yaouane.

Ma mije speret Apollon
Ou l'esprit d'un Voltaire,
Me mije composet eur son
Mais hélas! comment faire,
Couscoute me a so pedet
Par quatre Demoiselles.
Da ober deze peh a couplet
Mais hélas! comment faire.

E han da goumans da guentan
Avec pen d'eloquence,
Dre u-un azezo so elon
Mais malgré ses souffrances,
Atao e deus eun air couant
C'est ma Virginie.
E daoulagad a so brillant,
C'est ma petite chérie.

Mamzel Loueoc so eur rosen
Une fleur chérie,
Hi a deus eun daoulagad
Ils sont dignes d'avoer
Eur speret dous eun galon vad
Une tête capricieuse,
Ma a vel voar e daoulagad
Qu'elle est très amoureuse.

Eloüison a deus eur hrestans
Un air très agréable,
Comparaget e ous Orans
So eur fleuren aimabl,
Espécial pa ve guisquet
Coiffée en artisanne,
E eur bijadar e gorlet
Ou la prend pour Diane.

Hoas a meus eun ad da ober
Et pour une jolie blonde,
A deus un daoulagad seder
Et une bouche ronde,
Me gret e hé eur min arc'hant
Quand on s'approche d'elle,
Me a lavaro franchamant
C'est la charmante Adèle.

Me gret var an dimezelet
Avoer remplie ma tache
En cas a ma venn bet manquet
Aucune d'elles ne se fâche
« Prest on da gemer ma fluen
Pour corriger l'ouvrage
Pe d'en adoher pen a ben
Que je puis davantage.

An hini neveys gret ar son,
N'a point de rhétorique,
Aliès e rim ep raisou
Il brave la critique.
Mes ma nije bet studiet
Un peu dans les sciences
Marteze nije composet
Avec bien plus d'aisance.